

Zôn ar Jistr

432

(KANET GAND EUN TELENNER O FONT DA VERVEL)

War dôn : « AR FINISTER »

Digasit d'in, m'ho ped, mignonet,
Va zelen goz evit mervel ;
Ma teze, raog am mo peurzônet,
E teui an Ankou d'am gervel ;
Digasit atao
Va zelenik vrao.
'M euz ganthi keit all c'hoariet jabadao,
Ma veulin c'hoaz, mignonet,
Jistr ar gwir Vretonet.

An devez ma oan bet dizônet,
E oa blaz fall war va genou ;
Maes eur banne jistr a oa tennet,
Roet d'ar potr 'n e grabanou ;
Ar wren kerkert
Voutiz tre va dent,
Ar jistr a redaz e unan gant e hent,
Biskoaz aboe, mignonet,
N'em euz fallgalonet.

Empad va holl buhe dremenet,
Netra 'n euz kânet va zelen ;
Nemed Doue, Breiz hag ar Gened.
Ar bleün, aour hag ar jistr melen ;
Ha biskoaz n'em euz
Labeet va c'hreuz,
Gant traou da gas tud korf hag ene d'an treuz,
Vel hini-krenv alaouret,
Pe kos gwin Gallaouet.

Dre 'r sort evachou na brierter,
Nemed glac'har ha fallente ;
Lec'h ar jistr a brezeg an douster,
Ar peuc'h, ar joa, ar garante ;
Rak gantan vè graet
Eur zao d'ar spered,
War zu an oabl glaz lec'h e iugern stered,
Diwar jistr e vè kânet,
En yez ar Vretonet.

Sethu va fann karget a domder,
Ha va c'halon leun a esper ;
Brema me c'hai dinec'h ha zeder,
Da glask digor digant zant Pêr ;
Hag hen lavaro
Kerkent ma velo,
Liou ar jistr melen e korn va muzello,
« Digorbmp frank adarre,
« D'eur Breizad a zoare ! »

Ar jistr an euz eur galon dener,
Da gemer perz e stâd an den ;
C'hoarzin a rai pa vefoc'h zeder,
Ho trealzi mar pè anken ;
Nag a zonzj c'hoëro
'N euz kaset en dro,
Nag a lamm roet d'ar Blaneden garo,
Nag a daelou 'n euz zec'het,
En eur derri zec'hed !

Ar jistr, evel an heol binniget,
A lak pep tra ar liou gantan ;
Dre e c'halloud e vè kinniget,
D'ar paour an hunvreou koantan ;
Rei 'ra da Yann gèz
Eürusted hag aez,
Levenez, dudi, nerz ha pinvidigez,
Pa verv e deun e volen,
Splannoc'h vit aour melen

Oh ! mar n'ewfê ken ar Vretonet,
Netra nemed dour avalou ;
Veffent barrek, eun de da zonet,
Da drec'hi war an holl boblou ;
Dalc'hit 'ta, potred
Da jacha bepred,
Fors pe badeiant, pe dimei, pe eured,
'N eur drinka tre mignonet,
War jistr ar Vretonet.

Va mouez a glêvan o c'houtellat,
Tostât a ra d'in an termen ;
Digasit d'in c'hoaz eur skudellad :
Jistr alaouret araog tremen ;
Dispont rak maro
Trinkomp tro-war-dro,
Kenvo d'ac'h, va zud, va zelen ha va bro,
Ha kement tra 'm euz kânet,
Aboe ma 'z on gânet !

T. AR GARREK.